

ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur
SKRIVERZH HA MEREREZH
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthür,
Roazhon (K.R.P. 492-98, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET kas
C'HWEC'H REALAD timbroù pep
gwech ma fell deoc'h kemmfañ
ho chomlec'h.

**Gant skoazell
ar skol e ray
ar brezhoneg
ul lamm est-
lammus war-
raok.**

Skouer ur vestrez-skol a Vreizh-Uhel

gant an Itr. A. GUERCHET

Ro alies, siwazh, e klevet diwar-
benn skolioù boutin Breizh, n'o deus
nemet ur pal, divrezhonekaat ar vu-
gale a dlemp kentelien war Vreizh
ha deskiñ dezho ober goap war o bro.
Evidon-me, ha me ur Vreizh-Uheladez
ac'hanon koulskoude, an eurvad am
eus bet da dremen un nebeut bloa-
vezhioù eus va bugaleaj en ur gêrig
vihan eus Bro an Naoned, e-lec'h ma
oa ar skol voutin breizhatoc'h mar-
teze eget e meur a gêrig e Breizh-
Izel. Evel just ne veze ket komzet
brezhoneg eno. Ganet e oa ar vestrez-
skol en Naoned diwar gerent a
Vreizh-Uhel. Aet e oa ur wech e-pad
hec'h ehan-skol betek ar Mor Bihan
ha chapel Itron Anna Wened. Ne gred-
an ket ec'h anavezec lec'hioù all e
Breizh-Izel. Koulskoude, ha goulennet
ho pije diganti piv e oa, respontet he
dije krak ha krenn : « Brezhoneg
on ».

Ha skol a rae en ur c'hiz vrezhon.
Da gentañ, ficher e oa mogerioù ar
c'hias gant lies a skeudenoù diwar
pep korn eus hor bro. Emañ c'hoazh
dirak va daoulagad un nebeut anezho:
porzh Konk-Kernev ouzh an eil tu
hag hini Gwalien ouzh an tu all, hag
er c'hreiz, dez ar maro'had e Lanuon.
Bez' e oa ouzh ar voger ivez, nemet
e-tal ar prenestr e oa, un engravadur
bihan diwar an tiez kozh e Pondivi,
agvet gant ur skeudenn diwar ren-
kadenoù mein-hir Karnag. Ouzh traoñ
ar c'hias e oa tachet ur weladenn
diwar paludoù-holen Gwennann, ar
c'huzh-heol o parañ warno, hag unan
all diwar Beg ar Raz, warni tonnoù
eonek o tarzhañ war ar reier du. An
hini avat hag a blije ar muiañ dimp,
oa an hini anvet « E Pardon ar Fol-
goad ». Tremet a rae a-wechoù pla-
c'hed ar skol amzer ar c'hoari penna-
benn o sellout pizh ouzh dilhad
ken faro ar maouezed a weled bodet
e toull dor an iliz, dezho tavañjerioù
liesliv lizhin, dilhadoù brav a bep
doare ha koefoù a bep giz. Ha pet
ac'hanomp e-touez ar skoliadezed, n'o
deus ket labouret tenn, goude distreiñ
d'ar gêr, o klask sevel koefoù Breizh-
Izel gant tammoù kartoñs gwenn ha
kozh pilhoù dantelezh goulennet hag
adgoulennet pe zoken... laeret digant
hor mammoù. Ur gaer a daolenn
Impij an Amzer a oa ivez, ul liv breiz-
zhat dezhi abalamour d'ar bagad bu-
gale eus Pont-n-Abad a oa treset
warno o tañsal tro-war-dro roll an
eurvezhioù labour. Hag arabat ankou-
nac'haat ar pod-bieuñ feilhañ Kem-
per a oa war daol-skrivañ ar vestrez.
Gwelloc'h ' oa c'hoazh eget ar
skeudenoù breizhat. Bemdez, d'an
eur verket, e lennemp pep hini d'he
zro ul levr anvet Kerfeuri, war a
gredan, a oa kontet ennañ penaos o

doe daou baotr tremenet amzervezh o
ehan-skol e Breizh-Izel. Da c'houde
e skrivemp gant an nebeutañ a faziou
a c'hellemp ur pennadig lennet gant
ar vestrez. Hounnezh a zibabe alies a-
walc'h ur bajennig bennak diwar-
benn hor bro. Soñj am eus dalc'het
bremañ end-eeun eus un nebeut an-
vioù anezho hag a zo : An nevez-
amzer e Breizh; Ti ur pesketaer en
Arvor; ur Gêriadennig vrezhat, « Plou-
bazlaneg » hec'h anv, hag an anv-se ur
marzh gwirion d'hon divskouarn, ni
plac'het Breizh-Uhel koulskoude. An-
kounac'haet em eus, siwazh, penaos
e oa anvet an darn-vuiañ eus al le-
vrioù a veze prestet dimp gant
levraroueg ar c'hias savet gant ar ves-
trez. Bez' e oa en o zouez holl obe-
rennoù Toudouze, her gouzout war ar
c'hoazh, met ur bern a levrioù all a
oa ouzhpenn, eno plac'hedigoù anvet
on ».

Tumed, Gaod pe me'ar, a glave karr
an Ankoù o wigouret o nozioù teñval
ar mizioù. Soñj rezañ a zo chomet
ennon eus ur gonladenn vreaouac'hus
diwar-benn ur paour kaezh kouer
spontet-holl o teo'hout ken e c'halle
teo'hout trema Landerne, korriganed
peg outañ, e-pad nozvezh Nedelec,
ken n'eo chomet an anv a Landerne
un anv leun a draoù kuzh, a gevriñ
hag a vuzhuz evidon, betek ma wellis,
daou vloaz 'zo, kêr Landerne, ha me
kerse ganin, va c'hredit, o kavout ur
gêr vihan o ren enni ur vuhez sioul
hag hep faltazi ebet.

Gant ar c'hanaouennoù ivez e ve-
zemp lakaet da vourrañ e Breizh, rak
alies e kanemp war donioù brezhon
troet o gerioù e galleg, nemet ma
chome c'hoazh enno daou pe dri ger
brezhonek, a zistagemp n'ouzon dare
penaos. Deskiñ a raemp dindan eñvor
gwerzennoù a bep seurt o veuliñ bra-
ventez an taolioù-mein hag ar mein-
hir. Ret eo anavez, avat, ne veze ket
dibabet atav ar c'hanaouennoù hag ar
barzhonegoù eus ar gwellañ.

(Kendalc'h p. 4.)

AL LABOUR-DOUAR Kentañ Labourerion Vreizh

gant AR C'HOUEK KOZH

En amzerioù koshañ ma oa tud
o vezañ er bed, ne oa ket heñvel
hor bro ouzh Breizh a-vremañ. Un
amzer yen a rene, evel ma 'z eus
bremañ e Siberia; skornet e oa
an douar a-bezh ha ne oa ket a
dud, nemet, war vord ar mor, un
nebeut pesketaerion, a yae gant
bagoù bihan da dapout reuniget.
Ledenez Vreizh a oa neuze en he
fezh evel m'eo bremañ ribloù
pellañ Siberia pe Enez ar Zambli-
Nevez, ha tud Vreizh a veve neuze
evel ar Samoyeded pe an Eskimoed
a vremañ.

Goude-se e cheñchas an tem-
zaer. Un amzer domm a zeuas, ma
voe leun ar vro gant loened gouez
ar broioù tomm : leoned, tigred
h. a., ha goude, amzer yen-skorn
adarre. Diaes eo gouzout petra a
oa kaoz eus ar cheñch-amzer-se :
marteze ahel ar bed o cheñch plas
un tammig evel un doupiz o treiñ
hag a zeu a-wechoù da izelaat he
zroioù ha d'o uhelaat adarre. Ne
vern penaos, bez' e voe e-pad kant-
vedoù ha milvedoù hir-amzerioù
tomm hag hir-amzerioù yen heul
da heul meur a wech. Chaseourion
a oa neuze eus tud Breizh, o
chaseal al leon diouzh ar mareoù
tomm, o c'haloupat war-lerc'h ar
mammout e-pad ar milvedoù amzer
skorn.

Ne oa ket c'hoazh a labourerion-
douar; a-benn an diwezh avat e
teujont. An amzer a zo deut da
vezañ evel bremañ; doareoù ar
vuhez a zo heñvel ouzh hor re-ni;
dout a ra an dud da vezañ ijinus,
o kempen binviachoù gant sklisen-
noù mein ha goude-se gant mein
lufret; tud ar mare-se eo o deus

savet an taolioù-mein hag ar vein-
hir a welomp c'hoazh hiziv an deiz;
int-i eo o deus komañset da labou-
rat douar; int-i eo, erfin, a zo hon
tadoù-kozh, rak abaoe an amzer
gozh-se o deus kendalc'het da
chom e Breizh ha da labourat
douar kalz a-raok ar Gelted.

(Kendalc'h p. 3)

Ar butun hag an archerion

Farser awalc'h eo va niz Erwan.
En deiz all e oa aet d'ar vlin,
hep bout re hervez ar reizh, evel
dres.

— Ac'h 'ta, eme ar vatezh, pa
voe deuet endro, n'oc'h ket bet pa-
ket gant an archerion ?

— O ! 'lato, a respontas Erwan
faro, n'eo ket an archerion eidi-
don. Tost d'an Ti-kolo e wellis war
va lere'h daou archer. Diwall !
emezon din va-unan, ne vije ket
brav ma lakafe an aotrounez-se o
fri re hir em c'harr. Ha me da
sllakañ va foet, ha kêr-Iz, ar ga-
zeg vat, da droañ mar gouie.
Koulskoude e lostae beloioù an
archerion. Siwazh ! petra ober ? Ho-
pala ! n'oa ket kollet c'hoazh. Ur
soñj mat a zeuas em penn. Em
godell e oa ur pakad butun. Buan
hen sllapis war an hent. Setu an
daou ar-her touellet gant gwel ar
butun ken rouez; hag i ha lam-
mat diouzh o c'hezeg-houarn ha
n' em gantañ e-kreiz an hent da
c'houzout piv a yaje ar pakad
gantañ. Ha me da foetañ kêr-Iz
gant sllipenn ar skourjez, ha prim
d'ar gêr.

— Biskoazh kement all, eme ar
vatezh; ur mailh eo an Aotrou
Erwan, e gwirionez.

— Ha n'eo ket echu c'hoazh, a
lavaras Erwan; n'eo ket butun a
ou er pakad, foenn, ne lavarant ket.

Ar vicherourien saverien-diez ha labourioù a c'houde ar brezel

gant G.-B. KERVERZIOU

Diaes-kenañ eo hiziv an deiz da
vicherourien ar sevel-tiez, mañson-
nerien, kilvizien, amunuzerion,
plastrerion, toerien hag all, ober
o zreuz : abeg eo bet ar brezel da
fin al labourioù a raent ordinal, na
c'hellont bezañ graet bremañ
nemet goude bezañ bet un aotre...
ha c'hoazh pa gaver danvez ! Ret
eo bet dezho mont da gere'hat fred
e lec'h all, e tiez-labour bras peur-
liesañ, pell diouzh ar vro re alies
ivez. Ne bado ket, avat, ha kerket
goude ar brezel e tigor bloa-
vezhioù labourus-kenañ evit paot-
red ar sevel-tiez. Soñjit, e Breizh
hepken, kêrioù a-bezh da adsevel !
Daoust hag e c'hell an artizaned
soñjal kaout o lod en adsavidgezh
hor c'hêrioù dismantret ?

Ya, bez' e c'hellont, ma ouzont
en em glevout. Hag e c'hellan lava-
rout dezho es eus bet graet un taol-
esa dija a-raok ar brezel gant ur
genveurec'h-kenlabourant, anvet
« Soccab », hag a oa bet savet
gant Kevredigezh an Artizaned
Kristen. Penaos e oa deut renerien
ar strollad-se da lakaat micherou-
rien ar sevel-tiez d'en em glevout
ha da genlabourat ?

Da gentañ holl, o vezañ m'o doa
gwelet ne oa nemet artizaned,
koulz lavarout, o labourat evit an
tiez-kenwerzh bras o anvioù hou-
lus, evel « E di da bep hini » pe
« Un' doenn evidoc'h », pe traoñ
all seurt-se, renet alies gant Yuze-
vien, na raent nemet sunañ o osti-
zian da gentañ, hag an artizaned


dindano da c'houde, evit lakaat
ur bern arc'hant en o yalc'h. An
dud-se a werzhe tiez bihan seurt
ma kar ar vourc'hizien vunut hag
an implijidi war o leve lakaat da
sevel e fabourzioù ar c'hêrioù bras,
ha se war gred evel just. Hag o
vezañ ma raent brud en dro d'o
marc'hadourezh ken e findaone,
war ar c'helaouennoù, dre ar radio,
er foarioù, me' oar-me, e kavent
ostizien e-leizh bep bloaz, ha
dastum labour d'ober kement ha
ma karent. Unan eus a Yuzevien-
se, hag a oa krog da lakaat e
graban war Vreizh a-raok ar bre-
zel-mañ, en devoa graet e 1930
ouzhpenn 30 milion a aferioù gant
sevel tiez bihan, bet savet hogos
holl gant artizaned; n'o devoe ar
re-mañ, avat, nemet bruzunoù
diwar an 30 milion-se, ha ne oant
ket paet reizh bepred.

(Kendalc'h paj. 2)

SKOL BLISTIN

Addigoret eo Skol Blistin abaoe
dilun 17 a viz Ebril. Diwezhañ
trimiz ar bloavezh-skol a echu
d'ar 15 a viz Gouere 1944.

Distro eus un droid e Roa-
zhon, e trugareka ar Renar an
holl Vreizhiz vat, skoazellerien
ar skol, pa c'hell bremañ ken-
derc'hel ur pennad all c'hoazh.



SKOL « OBER »

Kelennerien hag harperien OBER, o deus graet, nevez 'zo, en
ur stal vras eus Kemper, un diskouezadeg eus doare-labourat ar
gevredigezh-se, a zo he c'hefridi ober skol vrezhonek dre lizher.
Komz a raimp hiroc'h hep dale diwar-benn OBER.

MORAERION GIBEREN

gant Roperzh AR MASON

Pemp mil a dud a vez o chom
e gourenez Kiberen. Ne dint e
gwirionez na pesketaerion evel e
Groec, na kouerion evel en « douar
bras ». Kent brezel 1914, e verdeo
lod muiañ ar wazed war ar mo-
rioù pell, e-pad ma rae ar maouez
war-dro da barkoù bihan ha d'un
nebeut saout. Ne besketae nemet
ar re gozh ne oant mui duac'h
da verdeat.

Ar re yaouank a yae, goude o
servij, war listri-dre-lien an Nae-
ned d'al liesañ. Chom a raent er-
maez c'hwec'h pe nav miziad evit
monet betek San-Francisco da
glask ed pe d'ar Chili da glask
nitral. Micher gallet ha risklus,
peogwir e oa stank al listri kol-
let tro-war-dro d'ar C'hap Horn.
Splann eo kement-se pa weler
kement a savadurioù, e beredoù ar
c'hourenez, lec'h ma lenner e-tal
bezioù gwirion, kizellet war ar
maen, skridoù seurt-mañ : « En
eñvor hini pe hini, kollet gant e
vatimant e bloaz pe vloaz... » Pa

lennet ivez meur a « ex-voto » e
chapel Itron-Varia Lotivi.

E-pad ar mizioù-se e labourer
ar maouez, ar re gozh hag ar vu-
gale war-dro d'o douar hag e
serrent kranked, chevred ha sli-
mor ken stank en onf. Douar grel-
lek Kiberen a vag avaloù-douar
ag an dibab ha gwez-tiez troue-
zhus. (Kendalc'h paj. 3.)

Nevez-voulet :
SINDBAD
AR MARTOLOD
diwar "Ar Mil Nozvezh hag Unan,"
aozet e brezhoneg
gant Roparz HEMON
Skeudenoù gant Z. HAAS
PRIZ : 30 LUR
LES EDITIONS BRETONNES
7, r. des Francs-Bourgeois, Rennes

AN AMZER O TREMEN

— Dambabaskaat a ra an emgannoù
e Rusia. Koll a ra ar Rused un tam-
mig tachenn dirak Narva, war har-
zoù bro-Letonia. Kilañ a reont ivez
e traoñ ar Menezioù Karpas, e Rou-
mania.

E bro-Grim, o deus lakaet ar seziz
en dro da Sebastopol.

— En Indez, e kendalc'h Japaniz
da skeiñ war-du Imp'hal, pe Mani-
pour, a-dreuz ur vro meneziek kenañ
ha difennet start gant ar Saozon.

E bro Sina, ez int loc'het war-raok
ivez er Houan.

— Krogadoù hep nemer a bouez,
en Italia an Traoñ, dirak penn pont
Nettuno.

— E-tal aodoù Aljer, kirri-nij an
Alamaned o deus kaset d'ar sond
seizh lestr-kenwerzh saoz hag ame-
rikat, hag pemp lestrig-drezel.

— Gwasoc'h-gwasoc'h a e en-dro
brezel ar c'hirri-nij. Bombezet man-
tus eo bet kreiz kêr Rouen gant ar
Saozon. Tizhet eo bet an iliz-veur
brudet, hag al lewr-gêr, ker brudet
all, lec'h ma voe devet Janed Ark,
gwechall. Kalz tud a zo bet lazhet :
war-dro 1.700 den.

Div wech, taol war daol, eo bet
bombezet ivez Paris hag e dro-war-
droioù. Koutezhet ez eus bombez sko
e iliz Montmartre. Ouzhpenn 1.500 den
lazhet.

Mont a ra ingal an Alamaned da
vombezañ Londrez ha kêrioù bro-Saoz.

MOUEZH HOR RE YAOUANK

Da geñver deiz-ha-bloaz ur skrivagner bras

JAKEZ RIOU

Nag a soñjoi e speredoù paotred Breizh Nevez pa darzh an anv-mañ war o muzelloù! Disheñvel int, moanvat, diouzh an den. Va lezit, mar plij, da zisplegañ va re. Eeun e vint rak n'on ket gwall ouizieq pa lavarint mat. Na kelou se! Komz gant va c'halon n'am eus c'hoant ken. Ha ne vo ket liv ar rambreal war va fennad rak, da geñver Deiz-ha-Bloaz un den brudet — Jakez Riou a voe ganet d'ar 1-añ a viz mae 1899, e Lotei (Bro-Gerne) — n'eo ket glabous ez eo dont da skeiñ en-dro war an tach, dlead strizh, avat!

Marv. Kuit a c'hoant-c'hoarzin, ar wech-mañ. Ma kouezhas va meud em dorn. Taolenn Yann Sac'h-Gwin, lazhet dre ober re gofadoù, am heugas un disterañ. Pezh a oa pal an oberour, diarvar ebet. N'eus forzh! Un eurvad e voe din tapout ul levr all. Geotenn ar Werc'hez e voe. Al levr ken mistr e daolennoù m'e-mañ hiniennoù sorc'hennet enno c'hoazh. Me, da gentañ, pa vev dirazon bremañ Bro-Gerne, bro Jakez Riou. Foaer 'zo er C'hastell-Nevez. Hemañ, un ebeul stag ouzh e garr, ha n'eo ket Yann ar C'her-neiz ez eo? Hennezh, o reddek ar saout d'ar gêr, kivist e benn.



Pennit Pennavern, e Lotei, lec'h ma tremenas Jakez RIOU e vugaleaj

Gwalarn, am boa koumanantet dezhi. Edo ganto, war ar marc'had, ul levrig Gorsedd Digor e anv, gant Jakez Riou. Ne ris ket forzh: edon o teskiñ brezhoneg abaoe tri miz hepken. Ha me da gregiñ diouzhtu, gant harp ar geriadur, da lenn ar pezhig-c'hoari-mañ. Gwelloc'h c'hoazh en em gavis gant va zaol eget n'em bije kredet. Eeun-tre e oa ar skrid da intent. M'hel lavar deoc'h, nag un tortad a ris war goust ar varzhed nevez! Ma pegas ennon ar c'hoant lenn oberoù all ar skrivagner-se. Digarez c'hoarzhin un tamm! Ar paotr-mañ, diouzh luc'hskeudennoù anezhañ tra ken, a hañvale bezañ dremmet. Daoust ma ouien — e krede din, d'an nebeutañ! — edo war e studioù e skolaj an Tadoù a Bicipus, e Bro-Euskadi, ne soñjen ket e vefe dic'hoarzh a-walc'h evit dont da vezañ beleg. Ar gwir a oa ganin, a gredan. Nann, bour-rañ a raen kentoc'h ouzh e welout oc'h hegasin e geneiled pe, na petra 'ta, e gelennerien. Eñ-vorennoù-skolaj, hep mar, a oa war e spered o skrivañ arvest kentañ Nomenoe-Oe. E berr, e kave din n'oa didorr ebet d'e c'hoant-farsal.

hed an hent, evit bezañ gwerzhel ur vuoc'h a-vihanoc'h-priz, hennezh, ha n'eo ket Yun, a soñje: « Me a lazho an den-se! »? Hag an holl dud-se c'hoazh n'o deus ken menoz nemet gwerzhañ pe bremañ un dra bennak, n'eus forzh petra a zo o c'hoarvezout er vro, ha n'int ket kourerien Nomenoe-Oe? Jakez Riou a voe Yann mil-wicher un tamm. Labourat a reas du-mañ, du-hont, evel kelaouenner dreist-holl, ken e teuas da anaout mat-tre spered an dud. Hag un doare eeun ha fentus en deus da lavarout o fegement dezho. Bis-koazh n'am eus her gwelet keh splann ha p'em eus lennet Dogan. M'hoc'h eus c'hoant kaout un tamm yec'hed, lennit al levr-mañ. Kaerat kraf-ouzh-kraf d'un den bet challet gant Beg-e-dog abalamour ma re war-dro « Breiz Atao! »

Evit An Ti Satanazel, siwazh, n'hellin — pa n'emañ ket ganin c'hoazh — lavarout tra. Sur on, avat, war am eus lennet diwar e benn, am bo dudi gantañ, rak Jakez Riou evit ober fent d'an dud n'eo ket ret dezhañ stagañ e gash ouzh Jost an arar.

Evel meur a hini, am eus keuz bras da Jakez Riou, kousket da viken e Ploare, en dije roet deomp bravañ frouezh hol lennegezh. Y. THOMAS AR RAVALLEG.

Kornig ar Merc'hed SKLERIJENN EN TI!

Dlead kentañ ur vouez a zo kinklañ he zi en un doare ma plijo d'he gwaz ha d'he bugale. Ma kav ar gwaz, echuet e labour gantañ, un ti sklaer ha naet, ur gador-vrec'h ouzh e c'horloz, n'en devezo ket mui c'hoant da vont da ruzañ war ar straedoù pe da chopina. Ha pebezh kemm a zo etre bugale savet en deñvalijenn e tier kozh ha bugale savet en un ti sklerijenn hag heoliet mat! Er re gentañ e kavo ar c'hleñved un daehenn vat; klanv-diglañv e vezint atav, hag e vezint ivez tud aonik dirak ar vuhez; ar re all, leun a feiz enni, a yelo, savet o fenn ganto, gwir wazed, ha yaeh-beuz ouzhpenn-se.

Preneustroù bras, setu ar c'hentañ tra evit kaout sklerijenn en un ti; an tier nevez o deus holl preneustroù bras, hag evit se an tier koshoc'h ez eo aes o brasaat peurliesañ.

A-raok ar brezel e veze kavet ridezioù marc'had-mat ha brav, livet splann ha plijus: ruz gant gwenn, glas ha gwenn h. a.; nijet int kuit eus ar stalioù, avat, pe neuze int ken ker, ma n'eus ket tu d'o frenañ. An dud a zo war an aod ez eo aes tre dezho kempenn ridezioù marc'hadmat: un tamm roued kozh, divet a nevez, da skouer rouedoù tramailh pe sardin, a ra brav an afer.

Peurliesañ e vez debret er gegin. Evit houmañ eta, traoù aes da naetaat ha da gempenn. Ar mogerioù a vez livet splann, gwer sklaer glas, louet pe gwenn; aes int da walc'hiiñ gant dour lisiv, pe razet, hag an doare-mañ eo ar gwellañ war ar maez; razet e vez ar mogerioù div pe deir gwech ar bloaz: gant eizh realad raz e vez fihet an ti, hep kentañ ez eo yaehus tre. Ar paper a zo da deurel a-gostez evit ar gegin; ne vez implijet nemet evit ar c'hambroù.

Al levr ivez a vezo aes da walc'hiiñ. An daroù eo ar pezh aesañ da zere'hel naet: un taol spote warnañ, ha pare pell 'zo. Hogen tud 'zo a gav yen un dra-se d'ar goañv; bez' ez eus tu da herzel ouzh ar yajenn en ur lakaat ur balenn blouz dindan an daol. Ar muiañ implijet avat, eo ar prenn. Bez' ez eus tri doare: Prenn natur, prenn livet ha prenn koaret. Ar planchod koaret n'eo ket da aliañ evit ar gegin, re a labour a zo d'e zere'hel lufius, hep kentañ ez eo ar c'hoar un danvez ken ral en amzer-vremañ! Ouzhpenn-se n'eo ket plijus nag evit ar vugale nag evit an tad kaout ar vamm atav war o choug abalamour d'ur banne dour fennet war al levr. An hini prenn natur a vez implijet ar muiañ; tomm eo hag aes da walc'hiiñ. Lakaat warnañ dour-lisiv da drempañ; broustañ gant ur broust-bag, ha goude bezañ broustet, stlepel dour naet, un tammig javel ennañ, ha se'hiiñ gant un tamm sae'h broue, setu graet an taol: buanoc'h hag aesoc'h eget war an daoulin. Ar planchod livet en deus ivez e aezamantoù: ne vez ket douzet ken buan hag ar planch-natur, pezh n'eo ket un abeg evit e walc'hiiñ nebeutoc'h, paneve nemet evit lazhañ ar poultrenn, rak houmañ eo an hini a zegas ar c'hleñved e-barzh an tiegezhioù dre ar mikroboù.

JANI R.

Embanner ha Merour: GW. BERTHOU. Kasadenn-lezenn: 2° trimiziad 1944. Niv.-voulañ: 2; niv.-embann.: 1. TI-MOULEREZH KREIZ-KER ROAZHON Aotre: P. C. 520.

AR VICHEROURIEN SAVERIEN-DIEZ HA LABOURIOU A C'HOUEDE AR BREZEL

(Kendalc'h ar baj 1)

Hag an ostizien? ha peadra o doa da vezañ laouen gant ar marc'had o devoa graet? Ne gredan ket. Bez' e oa mizoù-dre-vras ha tailhoù a bep seurt, a save bern war vern da geñver ur seurt doare-labour, ken e teue an ostiz da baeañ, peurliesañ, 12 pe 15 % keroc'h eget pa vije aet da gavout ur saver-tiez eus ar vro.

Ret e oa klask terriñ ur seurt embregerezh, teurel er-maez paotred an arc'hant gounezet diboañ, ar sunerien, ha klask en em gle-vout a-benn da ober hepdo. Skoazell a gavas hor C'hevredigezh digant un ijinour saver-tiez, boazet mat ouzh ar seurt labourioù, ha setu ma voe anvet ar paotr-se ijinour-rener ur c'hooperativ a voe krouet etre un ugent bennak a dud (Bretoned an hanter anezho). Ha dav d'al labour! ha kregiñ da ober berzh zoken. pa zeuas ar brezel da derriñ hol lañs.

An nebeut a zo bet graet, avat, en deus diskouezet anat e c'hell ur strollad-kenober, ur c'hooperativ, savet gant artizaned barrek war o micher, lakaat an dud da dremen hep ar pezh a anver « entrepreneur général » seul wech ma kemer hemañ micherourien dieub, da lavarout eo artizaned, dindanañ, seul wech eta ma ne vez nemet un hanterour di-ret etre an ostiz ha saverien wirion an ti nevez. Bez' e c'hell ivez reiñ kred d'an ostizien e vo graet mat al labour, dindan evezhiadurezh un tisavour pe un ijinour gouest-mat, hag e vo diarvar perc'henn an ti nevez e-keñver ar waranteiz dek vloaz; bez' e c'hell aesañ d'an artizan kaout e arc'hant, dre baeañ anezhañ a-feur ma sav e labour, goude bezañ graet emglev gant un « ti-bank ar bobl » pe kooperativou-kreataat; bez' e c'hell reiñ d'an dud a vicher kement a skoazell

hag o deus ezhomm, da skouer evit kaout marc'hadourezh marc'hadmat pe war gred, alioù da geñver kudennoù e vicher, alioù da geñver kudennoù ar c'henwerzh, alioù evit paeañ an tailhoù hep bezañ mac'homel, skoazell evit kaout an arc'hant dlead ma ne bae ket an ostiz; keloù war al labour a vez d'ober er vro, hag all, hag all...

Ret eo dont a-benn eus beli diharz an arc'hant. Ret eo lakaat darempredoù eeun etre an ostiz hag ar vicherourien a savo dezhañ e di, kuit a dremen dre dud n'int nemet renerien vurevioù ha neket tud-a-vicher, n'o deus ket desket ar vicher disavour, n'int nemet konversanted o klask pinvidikaat dre rediañ an dud hag an artizaned da dremen dre o hanterouriezh. Ret eo dieubiñ micherioù ar sevel-tiez eus o sunerien. Ret eo soñjal dreist-holl en amzer ar peoc'h, neuze o devo an artizaned da ziwall diouzh seurt tud! Ne c'hellint en em zifenn hag ober berzh en o bro nemet dre en em glevout, dre en em vodañ, dre en em skoazellañ evel m'her c'hinnig dezho Kevrenn ar Micherioù er « Framm Keltiek ».

G.-B. KERVERZIOU.

(Displeget e Roazhon-Breizh an 29 a viz Meurzh 1944.)

ROAZHON-BREIZH

SUL 30 A VIZ EBREL Kardeur Breizh-Uhel (G.)

19 e. — Kaozeadenn; kanaouennoù. LUN 1-añ A VIZ MAE Breizh al Labour-Dour

19 e. — Penaos e vez laolet evezh ouzh al laezh (G.), gant Esnault. 19 e. 08. — Petra eo mont war-raok (B.), gant ar C'houer Kozh.

MEURZH 2 A VIZ MAE

18 e. 30. — Kanaouennoù kozh « Vreizh-Uhel, gant J. Nizp, kempennet hag aozet evit al laz-seniñ gant Jef Pennweun, a vlenio laz Roazhon-Breizh; displeget gant Strollad Rannyezherien Roazhon-Breizh.

Kardeur Breizh ar Mor

19 e. — Ar pesketaerezh en amzer-da-zont (G.), gant Rene Dyèvre. 19 e. 08. — Pesketaerezh ar Sardin e Bro-Dreger (B.), gant Roparz Broudig.

MERC'HER 3 A VIZ MAE

19 e. — Sport ha Yaouankiz, gant Jorand, Ewan Kroezer, Yann Taleg.

YAOU 4 A VIZ MAE

Kardeur ar Brezhoneg 19 e. — Kentel brezhonek, Andreu Gellig. 19 e. 10. — Dre al levrioù hag ar c'helaouennoù (G.), gant Y. Drezen.

GWENER 5 A VIZ MAE

Ar Vuhez Keltiek 19 e. — Keltier eus ar broioù keltiek (B.), gant Jord ar Mee. 19 e. 08. — Baile Fearste (Belfast) hag An Naoned (G.), gant Kalondan.

SADORN 6 A VIZ MAE

18 e. 30. — Un dro-vale a dreuz ar broioù keltiek gant paotred Bodadeg ar Sonerien (B. A. S.), gant skoazell an dimezelled Foll, Fredi Noel, Dorig Ar Voler, Paol Monjarret.

Kardeur ar Framm Keltiek

19 e. — Frañsez Debauvais (B.), gant Roparz Hemon. 19 e. 08. — Moris Fleury (G.), gant Remont André.

AR C'HLOC'HIG

— Te 'oar pelec'h emañ chomet « ar brezhoneg er c'henwerzh »?

— M'eus aon ne ve beuzet e puns an ankounac'h! Rak-se, kleu, bez' e kredan ez eo tremen poent seniñ ar c'hloc'hig-galv. Hor yezh a denno he mad diouzh se. Ne gav ket dit? Sell! Lenn 'ta ar bapereñnig-mañ bet digant ur mignon:

KRAZENNOU - BARA evit ar yec'hed AR C'HLOC'HIG Pouez krenn { 250 gr. Poids net { 250 gr. NAGOT ha GOASDOUE 2, Straed Erlon - NAONED 2, Rue d'Erlon - NANTES

— Ya, emañ ar gwir ganit. Dispar evit ar brezhoneg. N'anavezen ket ar c'hrazennoù-bara-se, met pa vez graet gant hor yezh evit o brudañ, bez' ez eo ret da Vreizhiz reiñ harp dezho: Brall d'AR C'HLOC'HIG!

BOUDIG AN AOD gant Paol FEVAL

Aozet e brezhoneg gant Per DENEZ

« Ha Jozon Drelin ha lavarout dezhañ: « — Klaouestre! Da arc'hant evit va zi! « Sellout a reas paotr e sac'had arc'hant ouzh an ti. Mat e oa. Hag eñ da respont buan: « — Tonk aze! Da di evit va arc'hant! « Hag ar verourien all da grial: « — Klaouestre a zo. Ur c'hozh kilhog dibluet neb en em zilavar! « — Evit gwir », eme Aobri, « evel o soñjal a vouezh uhel, « ur soudard mat ouzhpenn e vo ». « — O! feiz, Aotrou Aobri », a respontas Brunev, « Jozon Drelin n'oa ket soudard tamm ebet, sakrist, ne lavaran ket. » « — Alo! kerzhomp mibin, breur Brunev! Emañ lanv gant ar mor ha ret eo dimp mont da Veze-len. »

« — Gouzout a ran. Aotrou, gouzout a ran. Ne fell ket deoc'h eta klevout penaos e reas Jozon Drelin da evañ an holl zour a rede er stêr Rañs, a Blouer betek Sant-Suljiag? » « An darn-se eus an istor, koulskoude, eo a zo burzhudus. Soñj am eus, pa voe kontet d'ar breur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon... O! o! met ar breur Pakom eo a c'hoarvezas gantañ un avantur mat er bloaz seizh ha tregont! Soñjit 'ta, aet e oa, d'erc'hent Nedeleg, da gerc'hat gwin evit an teir oferenn... » « — Buanoc'h! » a droc'has Aobri, « kerzhomp buanoc'h, setu ar mor o tont ». « — Jezuz! eus va gwellañ e kerzhan. Bouzar eus ur skouarn e oa ar breur Pakom adal ar bloaz eizh warn-ugent ma oa bet flemmet gant un amprevan noazhus en edeier Normandi. « En ur vont da gerc'hat gwin evit an teir oferenn, ec'h en em gavas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pelleterien ha meginerien kêr Avranches. Ha c'hwil 'oar penaos e timezas, ar mestr Olier Chouesnel-se? Met, n'eo ket eus mestr Olier Chouesnel eo e vennis komz. Distroomp d'ar breur Pakom... Nann, da gentañ, echuomp istor Jozon Drelin, sakrist Sant-Yann ar Gwaremmoù. Ar re

all a zeuio goude. « Ur barrez vrav, Aotrou Aobri, lec'h ma anavezis ur c'hure e anv Melin Moro hag a roe, pa venne, darbar tenn d'ar c'hiniad el letrien. « E vreur yaouank a werzhe kig-moc'h, viou poazh kalet, bloneg, soavon, fourmaj hag amennenn sall war marc'had Roazhon. Mervel a reas diwar an taolioù a skoas gantañ e drede gwreg. « Ur plac'h a benn, houmañ! Ar bloavezh ma varvas-eñ, soñj mat em eus, e krogas an tan en iliz Sant-Sulpis Foujera ha va eontr Maze, mevel ar chaloni, a voe torret dezhañ e c'har gant ur marc'h pennfollet. « Neuze, tapet brav e oa Jozon Drelin pa voe ret dezhañ evañ ar stêriad. « Leñvañ ha gouelañ a rae e hanter-diegezh, o lavarout: « Douc r'en devo truez ouzhip. Setu ni lakaet war an douar noazh!.. » N'en doa ket ar breur Brunev distaget mat ar c'homzoù-se ma krogas Aobri rust-meurbet en e vrec'h hag e sachañ d'e heul. Betek o c'hof-gar e save dija an dour ha, war an aod-se, pa sav an dour betek ar c'hof-gar, ne vez ket pell o c'holeiñ ar penn. C'hoarzhin a reas ar breur Brunev pa voe adarre

KELEIER EUS AR VRO

TAILH AR C'HOUEVR

Spontus ar gounnar hag ar reuz a sav, e Breizh a-bezh, abalamour d'an tailh nevez ha dic'hortoz a zo goulennet, a-drak, digant ar Vretoned. War zigarez gallout reiñ sulfat da winiegerien ar C'hreisteiz, e c'houlennet digant an holl tiegezhioù reiñ kement ha kement a hektogrammoù kouevr, pe neuze arem, staen, plom, ha me oar-me. Mil lurioù a ranko paeañ ar re n'o deus — ha niverus int — na kouevr na metal all da ziouerñ. Na petra 'ta! N'o deus nag uñ gastelorenn na netra e kouevr!

Ma vefe asantet ervat ouzh goulenn paotred an tailhoù, pemp mil tonennad kouevr an hini a vefe da

reiñ gant ar Vretoned, pe... 25.000 tonennad plom. Da belec'h ar gurun ez ay unan da glask ar metal-se? Ha, ma no baer ket e metal, graet mat ar gont, **PEMP MILIARD HA PEMP KANT MILION A LURIOU** eo a vo ret d'ar Vretoned dic'hodellañ!..

C'hoazh, c'hoazh, ma vije bet roet dezho gwinn en eskemm hag e trok. Nann! **DAOU LITRAD, TRI D'AN HIRAN TOUT, SETU PEZH A ROER BEP MIZ, D'AN HIRAN TOUT, D'AR VRETONED.** Mat eo frotañ mel ouzh bog an Jud...

Arabat, avat, souezhiñ, pa zichekont, nag e lavaront: **NANN**...

Pell diouzh ar Vro

TRAOU NEVEZ. — Abaoe pell zo e kave d'ar C'hallaoued, ha d'ar Barizianed muioc'h c'hoazh, e oant ar speredekañ tud war an douar. En abeg da se, ez int bet tuet da c'hoapaat an dud all, ar Vrezhoneg dreist holl, abalamour m'eo hor yezh hag hon doare bevañ disheñvel diouzh o hini. Gwelet ha klevet eo bet kement-mañ er c'hoariva hag er sinema kent ar brezel. Da gredañ eo e cheñch menzioù ar Barizianed gant an amzer, rak abaoe ur miz, ez eont da Vontarnas da welout un arvest savet evit meuliñ Breizh, he bugale hag he flinvidgezhioù. Gwelout a reir eno trowadur-kamantoù breizhek, ardarvez Breizh, dañserezed a vicher o lañsal kayotenn ha jabadav renet gant biniaouerieñ gwirion eus K. A. V., kanet e vez zoken, e brezhoneg. « Dre an noz », ur son savet gant un Naonedad galleg a gavel.

Disul all ivez, e sal Pleyel, e oa ur gouel bras embregerezh korf gant merc'hed yaouank ur skolañ embregerezh. Pemp kant bennak a vere'hed yaouank a oa eno o tiskouez o ampartiz kaer pe gaeroc'h da welout.

D'echuiñ ar gouel, e oa korolloù e-giz ar Provañs, an Arvern ha Breizh. — Perak, — emezon d'ar rener, — perak hoc'h eus desket korolloù rannvroadel da vere'hed yaouank ho skolañ?

— Abalamour, emezi, daoust m'eo ganet an darn vuiañ eus ar baotrezed-mañ e Pariz, e chom un ere etrezho hag o c'hendadoù diwar ar maez, ha d'am meno eo un dlead kreñvaat an ere-se, ma ne vo ket ken divroet

ar yaouankiz-mañ en o bro. Ouzhpenn, ar c'horolloù kozh-se zo un didlamant hag un embregerezh korf war an dro, eus ar gwellañ.

« Ar vaouez a lavare din ar c'hom-zou-mañ he deus gouzdegezh ha skiant-prenet. Ha ma 'z eo mat desklif korolloù Breizh da Barizianed e tle bezañ gwelloc'h c'hoazh d'ar Vrezhoneg anaout anezho. Perak ne vefent ket desket en holl skolloù evel embregerezh korf? »

H. A. M.

BRO-DREGER

PLISTIN

C'HOARIVA BREZHONEK HA KANIRI. — Disadorn da noz ha disul diwezhañ, 16 a viz Ebrel, paotred an YKAM pe Yaouankiz Kristen ar Maezioù, o deus c'hoaricet dirak ur saliad leun-chouk ar fentus a bezh-c'hoari: *Ar Sorser*.

Ar sorser (en despet dezhañ!) a oa Ewan Thomas. Roll Marianna e wreg a oa dalc'het gant Fañch Briand. Ne oa den ebet trist, rak bazhodoù a oa diouzh an druilh. Jan-Pi, Jakou, Saik Totoro, Paotr e wiz kozh, gwisket a zoare, a reas bezh ivez.

Kent, ha goude ar pezh, avat, e oa kanaouennoù e peder mouezh dinadan renadur an Aotrou beleg Joly. Gant ar brasañ dudi e voe klevet lazkanñ paotred ha merc'hed Plistin o tispakañ deomp, e galleg, oberennoù Praetorius: *Kanaouenn a levezet, En ur c'hrabù leñval* (Nouellenn), *Biniou gant Gevaert, sonioù-pobl evel: War bont an Norz, Ar servijer beuzet, Na ouel ket, Janedig, Tri zaboliner yaouank, Ar Roue o vont d'ar chase, Ar soudarded koad hag ar soudarded plom.*

E brezhoneg e voe kanet tonioù dispar, kendoniet an darnvuiañ anezho gant an Ao. Gouadec, harluet siwazh: *Salud Breizhiz, gant karantez, Ni ho salud, Steredenn Vor*, ha, da echuiñ: *Kenavo deoc'h, gwir Vretoned.* Ar c'halonou a lavare moarvat, a-unan gant ar ganerien: « Doue ra viro Breizh en he c'haer, da viriken! »

Setu aze un abadenn hag a ra enor da Blistin ha d'an aozerien. An Ao. Joly, beleg yaouank dedennus hag oberiant, a zo ur mailh war ar sonerezh. Emañ o sevel lazou-kanañ ha c'hoari. Un dweez e vije avat bezañ kemeret kemend-all a boan evit un deiz hepken. Ret e vije bremañ d'ar c'hoarierien mont er panreziou troidro gant *Ar Sorser*, hag o c'hanaouennoù kaer. Hag ar re a zeuio d'o c'hlevet n'o devo ket a geuz, gound ne lavaran ket.

BRO-LEON

MONTROULEZ

HOR BOAZIOU KOZH. — Act eo e-biou sulvezh ar C'hazimodo, hag an holl her goar:

Da Sul ar C'hazimodo
E vez torret ar c'hozh podoù.
Ma lakopeded ar ru Sant-Melani ne vankent ket kennebeut — ha me unan anezho, — da sentiñ ouzh ar boaz.

A di da di ez aemp da zastum ar podoù kozh torret skouarn pe c'heñnoù dezho. Neuze e vezent leuniet er blommenn dostañ a oa « dindan ar Pont », hag e staged gant ar c'hoari « kaspodig ». Mouchet e veze daou-lagad hini pe hini, ha roet e veze ur geuneudenn dev dezhañ da skeiñ. Kaset e veze da vale da gentañ, evit e luziañ. Neuze e veze degaset dirak ar c'hozh-podoù. Urzh a oa da skeiñ teir gwech. Terriñ a ra ar podoù, strinkañ a ra an douar, pe e veze skoet e-kichen, meur a wech. C'hoarzhadeg a oa, met ar mammoù a veze droug enno ouzh hor gwelout o tont d'ar gêr gieb-par-teil!

Manchoù... divanch!

ha manchoù... manchek!

Graet e vez « manchoù divanch » eus un darn eus gwiskamant merc'hed Kemper. « An habid bourledenn » e-giz ma leverer. Souezhet on bet alies gant an anv-se. Souezhetoc'h on bet c'hoazh en deiz all o klevout e oa gwechall « manchoù manchek ».

Dre forzh goulenn en tu-mañ hag en tu-hont on deuet a-benn da c'houzout kement-mañ.

Gwechall gozh, kant hanter-kant pe daou c'hant vloaz marteze, e veze ar c'hiz e-touez merc'hed Breizh da gaout milginoù, manchoù distag. Pa veze ar merc'hed o vont d'ar pardon, me 'laka, ne lakaent o manchoù war o divrec'h nemet evit an oferenn, ar gousperoù hag ar brosesion.

Staget e veze an div vilgin-se gant ul lieten, skoulmet war ar c'heñ pe war ar bruched, emichañs. Ledanoc'h-ledanañ eo deuet al lieten-se da vezañ ken eo deuet ar « manchoù » da c'holeiñ, n'eo ket hepken an divrec'h, mes ivez laez ar c'horf. Ret eo krediñ ivez eo bet troc'het ar milginoù a-wechoù ha neuze e oa ur « manchoù divanch ». A-hend-all pa chome ar milginoù e oa ur « manchoù manchek ».

Alies e vez lavaret e laka ar c'hiz ar merc'hed da vont sot. Ma l'eo taol-mañ eo merc'hed kran Breizh-Izel o deus lakaet ar gerioù da sotaat, ken ne ouzont ket petra a lavaront. Ha pa vez kaoz eus gerioù e kafen e vefe war *Arvor*, ur wech dre vare, pennadoù diwar-benn gwiskamantoù Breizh, n'eo ket bet komzet kalz diwar o fenn e brezhoneg betek-hen. D'al labour merc'hed Kemper hag a lec'h all!

Kentañ labourerion Vreizh

(Kendalc'h ar baj. 1)

Den ne oar, evit gwir, pescurt tud e oant; lod a lavar e oant Ligured. Mesket int bet da c'houde gant ar Gelled, ar Romaned ha me 'oar; met ken padus e kendalc'h ar gouennoù kozh er memes bro ma c'hellonp lavarout ez omp c'hoazh, evit ul lodenn vras, diskennidi ar gouerion gozh a labourerion douar Breizh en-dro d'ar veinhir; hag e meur a lec'h e oa dija ar parkeier en o stumm a-vremañ koulz lavarout (1).

Treiñ a raent an douar gant an arar hag oc'hen staget outañ. Tiegezhioù o doa, kredabl, ha chatal evel bremañ. Pa zeuas er vro ar Gelled kentañ, da lavarout eo ar C'halianed, war-dro 600 vloaz kent H. S., ne voe ket kalz a cheñchamant: an dud nevez erruet a zeuas da vistri, ar re all da vevelion, ha netra ken; e-kreiz Bro-C'halia e oa neuze tiegezhioù bras-bras, gounezet mat a-walc'h, enno kalz a loened, dreist-holl bandennoù moc'h. E Breizh avat n'ouzon dare. Ne chom ket kalz a roudoù eus an amzer-se. Gouzout a reer evelato e veze gounezet douar Breizh gant aked ha preder, un tamm diwezhatoc'h, pa zeuas ar Romaned er vro. Gizioù Italia a zeuas d'en em veskañ gant gizioù kozh Arvor. Diskouezet eo kement-mañ gant an dismantrou chomet en douar: meur a « villa » — kenkiz, e brezhoneg —, a oa (evel-se e veze anvet an tiez war ar maez), hervez giz ar Romaned. Kavout a reer da skouer/roudoù unan e Sant-Meven, e-kichen Lesneven; unan all e Ploueskad, 1.500 metrad diouzh ar vourc'h, ennañ laouerieù bras da gouronkañ. Tro-dro Kemper e kaver ivez roudoù heñvel, h. a.

Moraerien Giberen

(Kendalc'h ar baj. 1)

Ar vuhezgezh-se n'he deus ket graet kalz a vad d'ar ouenn. Kouzadur ne lavaran ket! Redek e-pad mizioù war al listri, maget fall gant gig sal ha piz bras, war un dro gant kenseurlad a bep bro, setu ur vicher hag a zigor ar spered marse (fin eo hini tud Kiberen a-dra-sur) met ne greñva ket ar c'horf. Redek e-pad ur sizhun pe div dre straedoù San-Françisko pe Valparaiso, a davarin da di-kloz, setu ur vuhez ne daol gant ur ouenn nemet bugale wan, tud kamm ha tud foll, ken stank siwazh er c'hourevez! Bout alav pell diouzh ar gêr, mesk-ha-mesk gant estrenion, setu ur vicher na zoug ket Bretoned da vont feal d'o yezh ha d'o gizioù. Ne deo ket souezhus enta mar boe komzet galleg e Kiberen a-werso ha mar boe dilezet ar brezhoneg en iliz er bloazioù kentañ ag ar c'hantved-mañ.

A-c'houde brezel 1914 emañ kemmet an traoù. Marv eo evit mat ar verdeadurezh-dre-lien. Rannet eo ar wazed e teir lodenn. Hini ar re a verde c'hoazh war listri arall er broioù pell, hini ar re a ya war listri-roueder an Oriant, hini ar re a chom er verdeadurezh-vrezel (a oa dibaot-tre gwezharall). Deut eo kalz a hañvidi da dremen er c'hornad. Ma ne deo ket deut evel-se kalz a vad d'ene ar vro, siwazh, ret eo anzav ec'h a yec'hed ar ouenn war wellaet: beajoù berroc'h evit ar wazed, magadur fonnusoc'h ha muioc'h a argant evit an holl. A du arall gant ar vuhez aesoc'h emañ deut Kibereniz da vont lez-dantoc'h eget agent. Stankoc'h-dant eo pesketaerion ar vro vi-goudenn a labour bremañ er c'hourenez, evel merion ampart e-mesk grillhed-gwez dibreder...

Kentelius eo lakaet keñver-ha-keñver tud Kiberen ha tud enezenn C'hroez, hañval pakret o orin neozh. Diskouezet a ra kement-se pegen ponezus eo ar vicher war donkadur ur pobl. Gouarnet eo bet Groez, korf hag ene, gant o micher galet a besketaerion hag onestiz o buhez, peogwir e tistroont lies d'ar gêr, goude redadennoù un hanter viz bennak. Setu perak emañ chomet en enezenn jac'h ar ouenn ha tomm ar feiz! Neozh pounneroc'h eo spered an dud. N'o deus bet biskoazh evel re Giberen (ar Sikarned evel ma lavaront) mizioù hir da dremen war al listri-dre-lien, gant devezhioù dilabour leun a zivizoù hag a huf-vreol.

(Displeget e Roazhon-Breizh, an 19 a viz Ebrel 1944.)

AR C'HASTELL-NEVEZ

SKOLA-VREMAN? — Merc'hed flav o tremen dre an dachenn vras a zeug ganto:

« — Ar plac'h-mañ a zo sot-pitilh gant ar brezhoneg bremañ. »

« — N'eus ket pell 'zo. »

« — Me 'gred ez eo abaoe ma vez

PLOUGERNE

TRI BAOTR YAOUANK BEUZET. — Un darvoud mantus a zo c'hoarvezet, disul all, 16 a viz Ebrel, nepell diouzh Lilia, e Plougerne. Pemp paotr yaouank, Loeiz Bossard, 21 bloaz, Jozef Porz, 20 bloaz, Lusian Ugen, 18 bloaz, o chom e Lilia ha Yann-Vari Koatalen, 21 bloaz, ha Per Bouet, 18 bloaz, eus a Vrest, bet o tremen o goude-kreistevezh en Aber-Ac'h, a oa o tont en-dro gant ar vag, war-dro 22 e. 30, pa droas houmañ war he genou, hag hi ha goueleidiñ. Pev ar c'hant melr bennak e oa ar baotred diouzh an aod. An daou Vrestad, Bouet ha Koatalen, neuieren vat anezho, a c'hellas tizhout an douar, e-kichen Sant-Anton. Tri baotr Lilia, avat, a voe kollet. N'eo bet kavel o c'horfoù nemet diwezhatoc'h, antronoz.

AN DOARE-SKRIVA NEVEZ

gant Roparz HEMON
— IMPRIMERIE CENTRALE DE RENNES —
7, Rue des Francs-Bourgeois, RENNES
Priz: 16 real.

Manchoù... divanch!

ha manchoù... manchek!

Graet e vez « manchoù divanch » eus un darn eus gwiskamant merc'hed Kemper. « An habid bourledenn » e-giz ma leverer. Souezhet on bet alies gant an anv-se. Souezhetoc'h on bet c'hoazh en deiz all o klevout e oa gwechall « manchoù manchek ».

Dre forzh goulenn en tu-mañ hag en tu-hont on deuet a-benn da c'houzout kement-mañ.

Gwechall gozh, kant hanter-kant pe daou c'hant vloaz marteze, e veze ar c'hiz e-touez merc'hed Breizh da gaout milginoù, manchoù distag. Pa veze ar merc'hed o vont d'ar pardon, me 'laka, ne lakaent o manchoù war o divrec'h nemet evit an oferenn, ar gousperoù hag ar brosesion.

Staget e veze an div vilgin-se gant ul lieten, skoulmet war ar c'heñ pe war ar bruched, emichañs. Ledanoc'h-ledanañ eo deuet al lieten-se da vezañ ken eo deuet ar « manchoù » da c'holeiñ, n'eo ket hepken an divrec'h, mes ivez laez ar c'horf. Ret eo krediñ ivez eo bet troc'het ar milginoù a-wechoù ha neuze e oa ur « manchoù divanch ». A-hend-all pa chome ar milginoù e oa ur « manchoù manchek ».

Alies e vez lavaret e laka ar c'hiz ar merc'hed da vont sot. Ma l'eo taol-mañ eo merc'hed kran Breizh-Izel o deus lakaet ar gerioù da sotaat, ken ne ouzont ket petra a lavaront. Ha pa vez kaoz eus gerioù e kafen e vefe war *Arvor*, ur wech dre vare, pennadoù diwar-benn gwiskamantoù Breizh, n'eo ket bet komzet kalz diwar o fenn e brezhoneg betek-hen. D'al labour merc'hed Kemper hag a lec'h all!

PLOUGERNE

TRI BAOTR YAOUANK BEUZET. — Un darvoud mantus a zo c'hoarvezet, disul all, 16 a viz Ebrel, nepell diouzh Lilia, e Plougerne. Pemp paotr yaouank, Loeiz Bossard, 21 bloaz, Jozef Porz, 20 bloaz, Lusian Ugen, 18 bloaz, o chom e Lilia ha Yann-Vari Koatalen, 21 bloaz, ha Per Bouet, 18 bloaz, eus a Vrest, bet o tremen o goude-kreistevezh en Aber-Ac'h, a oa o tont en-dro gant ar vag, war-dro 22 e. 30, pa droas houmañ war he genou, hag hi ha goueleidiñ. Pev ar c'hant melr bennak e oa ar baotred diouzh an aod. An daou Vrestad, Bouet ha Koatalen, neuieren vat anezho, a c'hellas tizhout an douar, e-kichen Sant-Anton. Tri baotr Lilia, avat, a voe kollet. N'eo bet kavel o c'horfoù nemet diwezhatoc'h, antronoz.

Manchoù... divanch!

ha manchoù... manchek!

Graet e vez « manchoù divanch » eus un darn eus gwiskamant merc'hed Kemper. « An habid bourledenn » e-giz ma leverer. Souezhet on bet alies gant an anv-se. Souezhetoc'h on bet c'hoazh en deiz all o klevout e oa gwechall « manchoù manchek ».

Dre forzh goulenn en tu-mañ hag en tu-hont on deuet a-benn da c'houzout kement-mañ.

Gwechall gozh, kant hanter-kant pe daou c'hant vloaz marteze, e veze ar c'hiz e-touez merc'hed Breizh da gaout milginoù, manchoù distag. Pa veze ar merc'hed o vont d'ar pardon, me 'laka, ne lakaent o manchoù war o divrec'h nemet evit an oferenn, ar gousperoù hag ar brosesion.

Staget e veze an div vilgin-se gant ul lieten, skoulmet war ar c'heñ pe war ar bruched, emichañs. Ledanoc'h-ledanañ eo deuet al lieten-se da vezañ ken eo deuet ar « manchoù » da c'holeiñ, n'eo ket hepken an divrec'h, mes ivez laez ar c'horf. Ret eo krediñ ivez eo bet troc'het ar milginoù a-wechoù ha neuze e oa ur « manchoù divanch ». A-hend-all pa chome ar milginoù e oa ur « manchoù manchek ».

Alies e vez lavaret e laka ar c'hiz ar merc'hed da vont sot. Ma l'eo taol-mañ eo merc'hed kran Breizh-Izel o deus lakaet ar gerioù da sotaat, ken ne ouzont ket petra a lavaront. Ha pa vez kaoz eus gerioù e kafen e vefe war *Arvor*, ur wech dre vare, pennadoù diwar-benn gwiskamantoù Breizh, n'eo ket bet komzet kalz diwar o fenn e brezhoneg betek-hen. D'al labour merc'hed Kemper hag a lec'h all!

Mat an traou evit ar «populo»

war ar sec'h.

« — Trugarez deoc'h, Aotrou Aobri », emezañ.

« Fistilhañ a ran atav ha ne sellan ket pelec'h e kerzhan. Se a zegas da soñj din istor Martin kozh Sant-Jegu hag a voe beuzet en ur ganañ *War bont an Naoned*. Neuze, gwreg Jozon Drelin... »

« — Milgurun! va breur! » a grias Aobri, « e kounnar ez in ma ne roit ket peoc'h da vat gant Jozon Drelin hag e wreg!.. »

Sabatuet-mik e sellas ar breur mat outañ.

« — Ne blij ket deoc'h an istor, Aotrou? » emezañ. « Souezhus eo. Met, da bep hini e c'houst, goude-holl. Neuze, ez an da gontañ deoc'h avatur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon. »

« — Nag an avatur-mañ, nag hini all ebet! Dalc'hit war ho latenn, va breur, ha sachit ho ho kilhorou; anez e vimp gronnet bremaik gant ar mor. »

« — O! » a respontas ar manac'h mat, « sur am bo amzer da zanevell deoc'h petra a c'hoarvezas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pellerien ha meginerien kêr Avranchez, deiz e eured. »

« — Ur ger ouzhpenn, va breur, hag ho tilezan. »

« — Mat! mat! Aotrou Aobri, arabat deoc'h

Mat an traou evit ar «populo»

war ar sec'h.

« — Trugarez deoc'h, Aotrou Aobri », emezañ.

« Fistilhañ a ran atav ha ne sellan ket pelec'h e kerzhan. Se a zegas da soñj din istor Martin kozh Sant-Jegu hag a voe beuzet en ur ganañ *War bont an Naoned*. Neuze, gwreg Jozon Drelin... »

« — Milgurun! va breur! » a grias Aobri, « e kounnar ez in ma ne roit ket peoc'h da vat gant Jozon Drelin hag e wreg!.. »

Sabatuet-mik e sellas ar breur mat outañ.

« — Ne blij ket deoc'h an istor, Aotrou? » emezañ. « Souezhus eo. Met, da bep hini e c'houst, goude-holl. Neuze, ez an da gontañ deoc'h avatur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon. »

« — Nag an avatur-mañ, nag hini all ebet! Dalc'hit war ho latenn, va breur, ha sachit ho ho kilhorou; anez e vimp gronnet bremaik gant ar mor. »

« — O! » a respontas ar manac'h mat, « sur am bo amzer da zanevell deoc'h petra a c'hoarvezas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pellerien ha meginerien kêr Avranchez, deiz e eured. »

« — Ur ger ouzhpenn, va breur, hag ho tilezan. »

« — Mat! mat! Aotrou Aobri, arabat deoc'h

Mat an traou evit ar «populo»

war ar sec'h.

« — Trugarez deoc'h, Aotrou Aobri », emezañ.

« Fistilhañ a ran atav ha ne sellan ket pelec'h e kerzhan. Se a zegas da soñj din istor Martin kozh Sant-Jegu hag a voe beuzet en ur ganañ *War bont an Naoned*. Neuze, gwreg Jozon Drelin... »

« — Milgurun! va breur! » a grias Aobri, « e kounnar ez in ma ne roit ket peoc'h da vat gant Jozon Drelin hag e wreg!.. »

Sabatuet-mik e sellas ar breur mat outañ.

« — Ne blij ket deoc'h an istor, Aotrou? » emezañ. « Souezhus eo. Met, da bep hini e c'houst, goude-holl. Neuze, ez an da gontañ deoc'h avatur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon. »

« — Nag an avatur-mañ, nag hini all ebet! Dalc'hit war ho latenn, va breur, ha sachit ho ho kilhorou; anez e vimp gronnet bremaik gant ar mor. »

« — O! » a respontas ar manac'h mat, « sur am bo amzer da zanevell deoc'h petra a c'hoarvezas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pellerien ha meginerien kêr Avranchez, deiz e eured. »

« — Ur ger ouzhpenn, va breur, hag ho tilezan. »

« — Mat! mat! Aotrou Aobri, arabat deoc'h

Mat an traou evit ar «populo»

war ar sec'h.

« — Trugarez deoc'h, Aotrou Aobri », emezañ.

« Fistilhañ a ran atav ha ne sellan ket pelec'h e kerzhan. Se a zegas da soñj din istor Martin kozh Sant-Jegu hag a voe beuzet en ur ganañ *War bont an Naoned*. Neuze, gwreg Jozon Drelin... »

« — Milgurun! va breur! » a grias Aobri, « e kounnar ez in ma ne roit ket peoc'h da vat gant Jozon Drelin hag e wreg!.. »

Sabatuet-mik e sellas ar breur mat outañ.

« — Ne blij ket deoc'h an istor, Aotrou? » emezañ. « Souezhus eo. Met, da bep hini e c'houst, goude-holl. Neuze, ez an da gontañ deoc'h avatur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon. »

« — Nag an avatur-mañ, nag hini all ebet! Dalc'hit war ho latenn, va breur, ha sachit ho ho kilhorou; anez e vimp gronnet bremaik gant ar mor. »

« — O! » a respontas ar manac'h mat, « sur am bo amzer da zanevell deoc'h petra a c'hoarvezas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pellerien ha meginerien kêr Avranchez, deiz e eured. »

« — Ur ger ouzhpenn, va breur, hag ho tilezan. »

« — Mat! mat! Aotrou Aobri, arabat deoc'h

Mat an traou evit ar «populo»

war ar sec'h.

« — Trugarez deoc'h, Aotrou Aobri », emezañ.

« Fistilhañ a ran atav ha ne sellan ket pelec'h e kerzhan. Se a zegas da soñj din istor Martin kozh Sant-Jegu hag a voe beuzet en ur ganañ *War bont an Naoned*. Neuze, gwreg Jozon Drelin... »

« — Milgurun! va breur! » a grias Aobri, « e kounnar ez in ma ne roit ket peoc'h da vat gant Jozon Drelin hag e wreg!.. »

Sabatuet-mik e sellas ar breur mat outañ.

« — Ne blij ket deoc'h an istor, Aotrou? » emezañ. « Souezhus eo. Met, da bep hini e c'houst, goude-holl. Neuze, ez an da gontañ deoc'h avatur Pakom, eil mevel-kav an abad aet da anaon. »

« — Nag an avatur-mañ, nag hini all ebet! Dalc'hit war ho latenn, va breur, ha sachit ho ho kilhorou; anez e vimp gronnet bremaik gant ar mor. »

« — O! » a respontas ar manac'h mat, « sur am bo amzer da zanevell deoc'h petra a c'hoarvezas gant mestr Olier Chouesnel, sindig pellerien ha meginerien kêr Avranchez, deiz e eured. »

« — Ur ger ouzhpenn, va breur, hag ho tilezan. »

« — Mat! mat! Aotrou Aobri, arabat deoc'h

Digoll ar Ruz-e-dreid war ar Gwaskon

E dog izelaet war e dal, peogwir ne oa ket boas da chom digabell en ti, sachañ a reas an tad Rollan un boullhad moged bennak eus e gorn-butun, a-daoladoù, gant muioch a dizh. Arouez ma oa va zad-kozh o vont da zispiegañ un dra bennak, anat e oa. Marteze, saourus-kenañ, unan eus e danevellou e oamp ken lipous anezho.

Tavedek peurluviañ, e oa kustum da gomz dre grenn-lavarennou evel an dud kozh a vro Leon :

*Me a ra
Hag a dav.
Koaerezh ar vran
Ne lavar mann.*

E welout a ran (Doue r'e bardono), glas-wenn e vlev digempenn dindan e dog du ha peurbadus, rak, daoust d'e 76 bloaz, penn-moal ne oa ket va zad-kozh, na dizantet kennebeut. E zaoulagad lemmfurch ha gwidreüs war an dro, a oa bet garv en amzer dremenet, a vire bremañ, e don o ibiliou, n'ouzon dare peseurd flamm a vadelezh laouenaet ha sioul. Liv ler-mogedet e-groc'hen roufennet don ha reizh, a lakae da soñjal er valumetaerien gozh gwechall, pe gentoc'h e baleerien-vro, pennoù barzhed dezho, keizh karet a gase en o sac'h-biniou c'hwez ar gwerzioù e peb foar hag e peb pardon. E fri-erer, ur bouchad reun war e veg, hag e ziwuez moan, a roe dezhañ evel un doare a noblled, eus ar ouenn uhel keltiek a vez merzet du-mañ war ar beorien kement ha war an aotrounez.

Rak-se, digargañ a reas va zad-kozh e gorn war an oaled, hag ur sell laouen en-dro dezhañ war e selaouerien, goulenn a reas, daoust dezhañ hen gouzout ervat, hag anavezet e oa ganecomp tro-gamm Jozon Koatareg.

— N'ouzomp ket, Tadiñ kozh, lavar deomp...

War-se, e doare rakprezeg, e savas e dog da dennañ e chaok butun a-ziwar lein e benn evit el lakaat ez-eeun da c'hwezhañ e jod kleiz.

Gwechal-gozh e oa, ha bez' ez eus c'hoazh en deiz a hiziv, tud fall o spered (an estrenien e vez graet diouto), hag a vez boas da lavarout :

*Genaouek evel ur Breizhad
En e benn daou wenneg skiant gad.
Ha c'hwi a gred an dra-se, va bugale ?*

Holl c'hevier a dud sot: dre an danevell-mañ e welot, m'hen tou ruz war va feiz ! Nav gwech e tlefe treiñ o zeed an dud a gomz evelse, kent digeriñ o genou, betek gouzout e lavarferent sotoniou.

Pell a zo, en amzer ma 'z ae pep hini war e dreid da ober tro Bro-C'hall, unan, genidik eus Montroulez e Leon, Jozon Koatareg e anv, a yeas, eñ, koulz hag ar re-all, da labourat war e vicher er c'herioù hag er bourc'hioù eus kement rannvro.

Deut da vezañ munuzer ampart abaoe an dri bloavezh hir ma rede an hentoù evel ur pirc'hirin a ouiziegezh, Jozon a gavas dezhañ e oa poent distreiñ d'e Vreizh; ar pezh a reas, muioch a spered gantañ en e vouedenn-benn eget a aour en e yalc'h.

*Bili-mor en diribin
Ne vront ket a pezhin.*

Setu enta Jozon Koatareg, evel un cheul, o tont en-dro ar buanañ ma c'helle, met dre an hent berrañ avat, evel ur gazeg kozh a c'hwez foenn sec'h he marchosi.

Bale a rae prim, diarc'henn, en ur ganañ; ha ! va bugale geizh, hep botez ebet : ne oa ket dre ziouer anezho, dre arboell ne lavaran ket, rak en amzer ma komzan, traoù a lorc'h a seurd-se a veze gwerzet ker kenañ er c'herioù.

gant Roparz BROUDIG

— Kroc'hen va zreid a zo koulz ha sol-votez, a lavare Jozon evit farsal, tra ma vranskelle e votouler nevez-flamm ouzh beg e benn-bazh.

Dougen a rae e droñsad en e zorn : ur roched fresk, un toullad traoù dister, hag e yalc'had arc'hant skoulmet gant evezh en un tamm lienn; an holl draoù-se paket en ur mell seizenn-c'houzoug ruz karezenet. Ne oa ket pouner ar bec'h gant hor baleer, ha kerzout a rae, m'hel lavar deoc'h. Bremañ, an dud yaouank a hiziv ne ouzont mui bale war o zreid, ma n'eo ket un drouez evelket, gant o c'hirridre-dan hag o « bisikletou », 'vel ma lavarer. Me, ho tad kozh, am eus graet alies em yaouankiz dek lev en un devezh, eus Montroulez da Blistin, ha dont en-dro, ha c'hoazh ne oa ket aet an heol da guzh pa zegouezhen er gêr. Met n'emañ ket amañ ar gaouz...

Koulskoude, e Gwaskogn edo hor Jozon; un tamm mat a hent diouzh Breizh. Un nozvezh ma oa skulzh-divi, ec'h ehanas en un dayarn bennak war bord an hent, hag hep kontañ kaozioù, e c'houlennas ur soubenn domm digant ar batromez.

En ur c'hortoz, Koatareg a zeraouas evit an nauspel kwech da niveriñ e weneien, da welout ha ne gavje ket en diwezh un toullad reoù vihan ouzhpenn, peadra da bremañ ur profiñ d'e vuiañ-karet.

Beuzet evel ma oa el labour dudius-se, ne welas ket hor beajour an hini a zeuas-tre er sal d'an ampoent, hag a oa anezhañ perc'henn an ostaleri e-unan. Hemañ avat, diouzhtu, en ur serr-lagad, p'en devoe merzet Jozon ouzh taol, a lavaras daou c'her a vouezh izel d'e wreg, hag eñ kerent e-maez, tra ma gendalc'he an ostizez war dro he fornigell.

Un pennadig goude, setu un den trouz gantañ o tont-tre en ur strakal an nor war e lerc'h, peadra da zihuniñ un den marv, ken e savas Koatareg e benn, ha ken prestik all e weneien e foñs e c'hodell.

M'en dije taolet pled Jozon bremañ souden, en dije anavezet an ostiz dindan neuz an degouezhiad. Met siwazh dezhañ !

*Pa zispaker arc'hant
Al laer a vez tanv-e-fri;
Hogen, louarn dre gant
Glask e varv 'barzh e doull-pri.
Neb a vez lemm e spered
A gavo f'inoch'hepred.*

Setu enta an estrañjour dirak Jozon Koatareg, o c'houlenn mont ouzh taol a-gevret gantañ. Ar pezh ne nac'has ket Jozon. Petra fell deoc'h ! Daoust ha ne vez ket degermeret mat an estren hag an tremeniad en e vro du-hont ?... Ha neuze, perak en dije eñ eveshaet ouzh dremm ruz ha lart ar paotr tev a oa dirazañ, d'en em c'houlenn pe vicher oa e hini, skiliaver pe berc'henn un ostaleri evel houmañ ?...

Hemañ avat, komzer flour evel ma vez boas tud ar c'hreizteiz da vezañ, a zeraouas diouzhtu gant e gozh-kaozioù.

— Té, mon boñg, eus pelec'h que tu viens ?... Hag all...

Ober a rae Paotr-an-Heol ar c'houlennou hag ar respontoù, ken n'en devoa Koatareg nemet e selaou. Aesetoc'h a se a yae ar gaouz ganto.

— Un ti a-zoare amañ, komper... an ostizez, koulz lavarout, ur geginerez dispar... Fri awalc'h ac'h eus bet da zibab an ostaleri-mañ kentoc'h eget unan all...

— Arsa, va faotr, o klask ober goab emaut ?... Diaes e vije bet din kaout he far e ser pemp kardlev, peogwir n'em eus gwelet hini all ebet war va hent.

— Itron, eme egile hep selaou, diskennit deomp, ni ho ped, peb a werennad gwin mat en ur c'hortoz ar geustereunn...

Koulskoude, da heul ar gwin, dont a rae bravig awalc'h ar gaouz gant an daou gomper.

*Chopinad goude chopinad
Gwin gwenn mesk-ha-mesk gant hini
[ruz.]*

Hogen, setu ar soubenn o tivogediñ war an daol.

— Hañ, hañ, eme Jozon :

*An iliz 'kreiz ar barrouz.
Petra eo ?... Souben ar rouz
Neketa ?... Al loa er bod,
Ha da behini e lod...
Pe soubenn an dri drag ?
Dour, holen ha baraig ?...
Ne ran forz, soubenn ar soubenneg,
Ma ne deo ket lart a vo kofek...*

Ha dav dezhi !

Ar pezh a zo ret gouzout, eo penaos e oant erru o-daou ken meyv an eil hag egile, daoust d'an ostiz da vezañ bet war e evezh...

Goude ur serr-lagad a-berzh e wreg, setu an ostiz o sevel a-daol trumm, en ur lavarout e skouarn egile :

— Va faotr, gortoz ac'hanon ur pennadig, ez an da zont en dro rak-tal.

Ar pezh ne oa ket evit souezhañ Koatareg, Daoust ha ne sav ket ar c'hoant staotañ gant an dud ker prim all a-wechoù, ha, dreist-holl, diwar re lonkañ ?...

Koulskoude, kavout a rae Jozon hir-awalc'h an amzer; padout a rae an abadennig diouzh e veno. Dihabaskaet a-benn ar fin, e c'houlennas digant an ostizez :

— Daoust hag e vije anavezet ganec'h, Itron, an den en deus koaniet ouzh taol ganin fenozh ?

— N'eo ket avat, va den mat. Amañ, 'vel ouzoc'h, eo ul lec'h ma tremen drezhañ kalz tud bemdeiz, diavaezidi an darnvuiañ anezho.

— Gwall nec'het on, Itron, rak, evelato, ret e vije dezhan pacañ an hanter eus an dispign.

— Eveljust, a gendalc'has an

KORNIG AR VUGALE PAV-ROUS, AL LOUARN

Chom a rae Pav-Rous e ti Tadiñ-Kozh Louarn, ha, klevit mat, tiad Pav-Rous a oa niverus, niverus-bras, ken niverus e gwirionez m'he devoa kalz a boan Mammig Louarn o pourchas boued da gement all a c'henaouiou bihan marnao-niet.

Setu perak he devoa roet an aotre da Pav-Rous da zont da di Tadiñ-Kozh Louarn, da chom gantañ. Hemañ avat a oa ar furan, ar flañ, an evezhiekañ eus an holl lern a-ziwar-dro.

Un deiz e kavas da Dadig-Kozh Louarn e oa Pav-Rous bras awalc'h bremañ evit deskiñ kement a rank pep louarn gouzout evit ober e dreuz er vuhez.

ostizez goapaüs an tamm anezhi a-zivout ar paour kaezh Jozon; hogen, ma ne deu ket en dro, deoc'h-c'hwil e vo an holl dispign. Evidon-me, ne vern piv a baco, gant ma vo roet an arc'hant din.

— Evelato, evelato... a lavare Goatareg evitañ e-unan, en ur brederiañ.

— Un dro-gamm a zo bet c'hoariet deoc'h, va den mat, gant ar farser a Waskon-se... a sklokas neuze e divskouarn Jozon ar yar-glud a ostizez.

A-daol-trumm e tibikouzas daoulagad hor foeter-hent en devoa merzet bremaik serr-lagad an batrez d'he c'homper.

Hag eñ da lavarout d'an Itron « Troñs-Kailhar », da reiñ dezhi he bazhyod da lipat :

— Kempennit din ur gwele mat, hag ur flip a-zoare kent ma 'z in ebarzh, me ho paco da c'houde.

Ne voe ket ezhomm hel lavarout div wech d'hor c'homer, a bignas diouzhtu d'ar gamb, e-pad ma kile Koatareg goustadik war veg e dreid war-du an nor. Tennañ an aalc'houez hag e lakaat en tu dia-va-se ne voe mann. Un dro a-zehou, ha setu an ostizez paket en he zavarn evel ur gaerell-vras en he zouarenn.

— Oh, oh, Gwraec'h kozh an diaoul, daoust hag e kavez tro-gamm er Breizhad par da hini ur Gwaskon ?... Gallout a c'hellez sunañ da flip da unan-penn, en ur c'hortoz bazhad bremaik digant da bried !...

Ha Koatareg en hent... Met kavout a reas e gomper er porzh, ha goulenn a reas digantañ :

— Me gave din 'oas kollet... Da betra e oas chomet ken pell e-maez, va faotr ?

— Da harpañ ouzh ar voger d'he mirout, a gouezhañ.

— Chom ta, chom ta, va faotr !... — Ha te, pelec'h ez ken buan ?

N'ez ket da vont a-raok evelse hep pacañ da dle d'an ostizez, eme egile...

— Da belec'h ez an ?... Da lakaat mein en tu-gin da sec'hañ, va faotr...

— Ha paeet ac'h eus, neuze ?... — Kont an ostizez a zo sklaer awalc'h. Met 'vit pezh a sell ar gwenneien, n'hellan ket pacañ... abalamour... abalamour em eus gwerzet va holl arc'hant... Kenavo, komper !...

M'hel lavar deoc'h, bugale, *Diboell ur Gwaskon
Ne dalv ul tiad kagal gedon.*

Adalek an deiz-se e kasas e vab-vihan da chasal hag, en ur redek war-lerc'h ar gouezaj, e teskas dezhañ kement a anavez, e e-unan, diwar-benn ar vicher chascour, da lavarout eo, an troioù hag an doareoù mat evit laerezh yer an tieg Kolaz, hep dihiniñ e gi, Brifaod e anv, hag ar mil feson hag unan da douellañ ar chas droukañ ha da sachañ ar skasoù buan pell diouto.

Er beurevezh-se, fresk ha laouen, edo Tadiñ-Kozh Louarn ha Pav-Rous o pillrotat seder amañ hag ahont, e-mesk ar Prajou-Glas, du-hont, er C'hoad-Glas, a-hed an hent-houarn war ziskenn.

Keit-all, biskoazh c'hoazh ne oa bet aet Pav-Rous. Ha bremañ e c'houlenn outañ e-unan : « Da betra an diaoul e c'hell servij un hent iskis evel-hen ? »

En e raok e rede Tadiñ-Kozh Louarn bepred. Degouezhet dirak ur pont bras ledan, e chomas a-sav :

« — Deus amañ, Pav-Rous, ha taol ur sell d'an traoñ ! » a gemennas.

Pav-Rous hag ober avat, met, gant ur sellig hepken war-du an traoñ e voe mezevellet war an taol, ken mezevellet all ma voe darbet dezhañ semplañ diwar re a aon.

Ha Tadiñ-Kozh Louarn ha dirrollañ da c'hoarzhin :

« — Ac'hanta 'ta, deus ganin d'ar penn all ! » emezañ, en ur dreuziñ ar pont, eñ e-unan, ha skañv e droad.

Pav-Rous avat, a oa ur c'horfad aon ennañ. Ya, aon en devoa o vont war ar pont bras. Ha ma kouezhje etre an treustelloù, e-barzh ar stêr, en traoñig-traoñ, pe war ar reier spouronus ?

En ur redek e teuas Tadiñ-Kozh Louarn war e c'hiz, ha dont dirak Pav-Rous :

« — Mezh dit ! » e youc'has. « Daoust ha petra a laka aon en-nout ? N'ac'h eus ket ezhomm sellout d'an traoñ. Te 'oar mat n'ac'h eus netra da zoupañ. Allo ! deus war va lerc'h. »

Pav-Rous, avat, a souze war-dreñv, a glemmiche, a c'houlennas ouzh Tadiñ-Kozh Louarn :

« — Kasit ac'hanon en-dro d'ar gêr, o, me 'm eus c'hoant mont d'ar gêr ! »

A-daol-trumm e voe gwelet Tadiñ-Kozh Louarn o sevel en ul lamm, doare warnañ da vezañ spontel-bras :

« — Ar c'hi war hol lerc'h ! Setu Brifaod ! » a youc'has. « Sachañ ac'han, buan ! Deus 'ta, sodig bihan. »

Hag eñ o tec'hout kuit war e bevar fav dre greiz ar pont.

Ne gemeras ket Pav-Rous amzer a-walc'h na da sellout, na da brederiañ. N'en devoa nemet ur soñj : tec'hout, tec'hout buan dirak Brifaod, ar c'hi gwall.

« — Gortozit-me, Tadiñ-Kozh kaezh, gortozit-me ! » a c'harme. Ha padal e troc'he, buan ha ma ouie.

Hag a-raok zoken ma vije deuet soñj dezhañ, setu eñ e-kreiz ar pont bras.

Pa erruas erfin er penn all, e savete, e kavas eno Tadiñ-Kozh Louarn, da vat war gab e revr, oc'h ober goap. Neuze e kredas Pav-Rous bihan, erfin, treiñ e benn evit gwelout e pe lec'h edo Brifaod, ar c'hi gwall. Ne welas roud ebet anezhañ !

« — E pe lec'h emañ Brifaod ? » a c'houlennas diheleket.

« — Du-hont emañ, e porzh Kolaz an tieg ! » eme dezhañ Tadiñ-Kozh Louarn, krenn ha krak.

Pav-Rous a savas e sellou d'an nec'h. Stagañ a rae da gompren en doa graet Tadiñ-Kozh Louarn aon dezhañ evit ma treuzje ar pont, ar pezh na grede ket ober.

Reuzedik e oa, ken e oa, reuzedik-bras, ha pinous.

« — Deomp d'ar gêr bremañ ! » eme Tadiñ-Kozh Louarn.

An dro-mañ, avat, e tremenas Pav-Rous war ar pont, kuit a ardou, hag hep rannañ grik.

A. GUERCHET.
(Displeget e Roazon-Breizh,
ar 29 a viz Ebrel 1944.)

KERLANN.

SKOUER UR VESTREZ-SKOL A VREIZH UHEL

(Kendalc'h ar baj. 1)
Dalc'het em eus soñj eus ur barzhonog « E 1369 » e anv, da skouer. Meneg a oa eus ur vesarezig vrezhon e nezañ en ur vont da heul he deñved a-dreuz al lanneg, ha setu hi oc'h en em c'houlenn :

*Combien il lui faudra filer de que-
nouillées
Pour payer la rançon de Bertrand du
Guesclin.*

Kentellet evel ma oa bet hor mestrez war istor Breizh, penaos he defe gallet gouzout ez eo bet Ar Gwesklon trubard d'e vro ?

Ret e oa d'ar vestrez evel-just mont da heul ar roll-labour savet evit holl skolioù Bro-C'hall. Da gredif eo koul-skoude e poueze un tammig muloc'h eget ma oa diet war istor hor Bro, pe gentoc'h war an nebeut a oule anezhi. E-pad ur miz d'an nebeutañ teir pp. bader eus ar skolladeged o deus bet keuz n'hellent ket bezañ bet Anna a Vreizh, ha komprenit mat, an

Dugez Anna eo, ha n'eo ket rouanez ar C'hallaoued.

Bravoc'h ez ae o'hoazh e sell an douaronlezh. Gwir eo, ne veze ket desket pishoc'h douaronlezh Breizh en he fezh eget ma oa kavet e levr ar Gouarnamant. Douaronlezh Bro an Naoned ne lavaran ket. Ul levrig aratozh a-zivout-se he doa prenet ar vestrez, ma oa displeget ennañ resis ha klok pinvidigezh ar c'hornad-bro. Ha kement-se a o'hellit kredif ervat : dud brasoc'h o deveze plao'hed ar skol o klevout anv eus houarn Kastell-Brant eget o c'houzout petra a vez kavet dindan douar Bro-Loren.

Ma setu evit ar skol voutin graet a-hed an deiz, d'ar vugale. Ouzhpenn hounnezh, avat, e veze graet div wech bep sizhun, goude koan, e-pad ar goañvezh, skol d'ar plao'hed koshoc'h, un dek bennak anezho, o oad etre pemtez hag ugent vloaz. Dont a raent d'ar « Skol-noz » da zere'hol soñj eus ar pezh o doa desket pa oant yaouan-

koc'h. Neuze ne veze ket kentellet gwis hervez ur roll labour strizh, hag er c'hiz-se e c'helle ar vestrez ober ken brezhon ha ma pilje dezhi. Levrioù Ar Braz, Ar Gofg, Brizeug, pe enno-rennoù yaouankiz Chateaubriand, e kastell Kambour, beajoù Jakez Casard, reder-mor an Naoned, setu al lennadennou a veze graet poullesañ. Lennet e veze ivez pezh en deus skrivet Michelet diwar-benn tud veur Breizh, Breizh hag he deus kement a wechoù « savetaet Bro-C'hall », evel ma lavar.

Da c'houde ec'h azeze ar vestrez ouzh ar piano hag e tigare levr sonioù Botrel. Goude ar c'hlas, ez ae kuit ar plao'hed o kanañ, ha, war a gredan, e teskent ar c'hanaouennou-se d'o breudeur pe d'o mignoned, rak meur a wech em eus klevet paotred ha plao'hed ar vro o kanañ a-gevret « Va bleuivenn ed-du » pe « Kenavo ». E galleg e voe kanet evel just, met koulskoude ha gwel ne oa ket eget diotajoù Paris ?

Ezhomm ebet lavarout ne oa morse anv er skol-voutin eürus-se eus ar Vrezhoned, tud sot, lent ha warlerc'hlet. A-wechoù e rae ar vestrez-skol « Tête de Bretonne » eus ur bugel pennek. Gouzout a rae ar skolladeged avat ne oa ket kounnaret evit mat ar vestrez neuze. Welañ a raent er c'hortol o mouezh o mestrez un